

Tud ar vro - Bro Leon
Roll kanaouennoù - Dañs round

O tistreiñ eus a Blouneour-Traezh

O tistreiñ eus a Blouneour-Traezh (bis)
Me 'glevas komz eus va mestrez, tira lon la lon la (bis)

An hini a garan ar muiañ
A zo o vont da fortunañ

Dilezel 'ra he bon-ami koant
Evit fortunañ d'an arc'hant

He zad he mamm dezhi 'lavare
Mont da fortunañ d'an danvez
(Mont da zimeziñ gant an danvez)

D'ur rouler kozh kriz e varv
Rankout chom gantañ betek ar marv

Ha bremañ 'deus bazhadoù bembez
Rebechiñ dezhi he danvez

An dra-se 'zo dipitus-bras
Rankout pokat d'ur barv kras

Ma 'm bije bet me sur ur gwaz
Ma 'm bije gouezet piv da choaz

Eñ 'vije bet c'hoant va santimant
Ha n'evje ket a win-ardant